

AN EOSTERIEN

Moderato

Daoust ma teu bri-ni gou - ez da
 skra bat hon ha-jou, Er par keier ar
 frouez a c'holo an nan-chou er
 par ke ier ar frouez a
 c'ho lo an nan-chou

Ar zon-man, savet war eun ton koz, dastumet gant
 Bourgault-Ducoudray, a dle beza kanet gant eur strol-
 lad kanerien.

Daoust ma teu brinñ gouez
 Da skrabat hon hajou,
 Er parkeier ar frouez
 A c'holo an nañchou.

Ar glao, an heol benniget
 Ha poan ar c'houerriad,
 A roio d'eomp, Bretoned,
 Bara, eur bloaveziad.

Tridomp, eta, gant dudi,
 Pa welomp o sevel,
 Eost founnus, daoust da gozni
 Douarou Breiz-Izel.

Holl, dourn ha dourn unanet,
 Poaniomp, gant levenez
 Da hada e pep spered
 Had ar vuhez nevez.

LOEIZ LOKOURNAN.